

RECIT

*Deus eur miracl burzudus c'hoarvezet gant eun itron vras
dre brotection Itron-Varia ar Follgoat*

Voar eun ton trist.

Mac'harit Frogil d'he mamm.

Ma mamm, id evidon d'ar Follgoat,
Dierc'hen, discabel, voar ho taou
[droad.

He mamm.

Petra a valeur oc'h eus-hu groet,
D'ar Follgoat pa leref monet.

Mac'harit.

Ma flac'hic, ma fla:h a gamp
E deus lazet ec'h innoçant,
E deus lazet ec'h innoçant ;
Hep c hritenes na badeziant.

Hen laquet, zivoas ! em goele,
Eur gontel noaz n'he goste cleiz.
Allas ! hi a zo achappet :
Me eviti vo quemeret !

Oa quet he guir peur achuet
Archerien en ti zo antreet.
Trivoac'h archer deus a Raon,
Trivoac'h all a Lanhuon,
Da guerc'hat Mac'harit d'ar prison.

Cri vije ar galon ma na voelje,
Voar hent bras Raon nep a vije,
O vonet d'ar prison entre tri,
Ar buguel n'eur haner dirazi.

Ha ma terre bele ma c'he :
N'eo quet din ar buguel-ze.
Ma flac'hic, ma fla:h a gamp
E deus lazet ec'h innoçant

E deus lazet ec'h innoçant
Hep christenez na badeziant,
Ha laquet nean em goele
Eur gontel noas d'he goste cleiz,
Allaz ! hi a zo achappet,
Ha me vit-hi zo quemeret.

Mac'harit Frogil a c'houleone
Er guer ar Raon p'en antree :
Pelec'h man ar prison aman
Ma zei Marc'harit en han.

Ar geolieres a lavare
Da Vac'harit Frogil neuse :
Tevet, Mac'harit, na oelet quet,
Prison d'ho laquat na vanquo quet.

Mac'harit.

Me garfe caout eur messenger
Da gas evidon eul lizer.

Ar geolieres a lavare
Da Vac'harit Frogil neuse :
Scrivet ho lizer pa guerfet,
Messajourien dec'h na vanquo quet.

Marc'harit.

Da gas eul lizer d'am maëronnes
Merquet varnezan a vuironnez.
Pa n'arri al lizer gant he maëronne^s
Eoe carguet a distidiguez,
Petra bennag ma oa en creiz ar zal
O'canan, o tripall, o tansal.

Ar paj bian.

Cetu aze al lizer : lennet-han :
Merquet ar vuironnez voarnnezan.

He maëronnez.

Me na voelfent quet eun daquen
Vit quelo len eun tam feuillen.
Voa quet ar feuillen digored mad
Ma coez an tour n'he daou lagad ;
Oa quet al lizer c'hanter lennet
Ter guech d'an douar eo zemplet.

He maëronnez.

Lequet ma c'haros din voar bost
Ma zin da Raon evit an noz ;
Lequet seiz a guezec voarnnezan.
Lequet arog a re voellan.

Ha pa diffe ar marc'h bep cammet,
Betez Raon renquan monet !
Ha pa diffe ar marc'h en peb heur,
Me a renq mont di en ter heur.

Mac'harit Frogil a lavare
Ni oar ar potaus pa bigoe :
Tud a justis, ma rafac'h o tever
Choui a rose din eun tam amzer
Ann amzer da distre en dro,
Ma larin dec'h eur guir pe daou.

Me voel erru ma maëronnez
Assamblez gant-hi eur varonez ;

Hac eur c'harroz equipet mad,
Er penn a rog Goerc'hes ar Folgoad.
He maëronez a c'houlenne
Digant he fillores neuse :
Petra a valeur ho peus groet
P'hen d'oc'h d'ar prison digasset ?

Mac'harit.

Ma maëronez, am excuset
Netra a valeur na meus groet ;
Ma flac'hic, ma flac'h a gamb
He deus lazet he innosant
Hep christenez na badeziant,
Hep christenez na badeziant,
Ha laquet voan em guele
Eur gontel noas n'he goste cleiz.
Allas ! hi a zo achappet
Ha me n'he flas zo quemeret.

Ar maëronez a lavare
D'ar boureo cri neuze :
Laquet ma fillorez er valans
Me rei he foezans en chevans.

Pouezet-hi eur vech ha diou vech,
Me rei he fouezans aour bep guech ;
Poezanz ma c'haros ha ma c'hezeq,
Ho foezans diou vech mar be red,

Ar boureo cri a respontas
D'ar vaëronez p'he c'hlevas :
N'en doc'h quet quen caër da varonez
M'ho pe poezans ho fillores,

Ar boureo cri a lavare
'Vellen d'h-geolier neuse :
Laquet anezi er potans
Rac ann heur bepret a avans.

Ar geolier.

Bet on ter guech voar he diou scoa
Ha nemed c'hoarzin ouzin na ra.

Ar boureo.

Quemer eur gontel pe eul lançon
Ha sco anezi don n'he c'halon.

Ar geolier.

Scoet meus-hi ter guech ennin,
Ha met c'hoarzin na re ouzin.

Ar boureo.

Ma, quez ganti da fagoderi :
Groa eun tantat tan evit e devi.
Eun tantat tan a d-i c'hant quenet
Mac'harit n'he greiz vo taulet.

He mates a lavare
D'h-c'hamaradez eun de a oe :
Hirio zo e n devez caër en Raon.
Lezomp pep tra en abandon.

Guiscomp hon habijou satin glas,
Deus rafe n'amzer ni ve voas.

En tal ann tan pen d'eo erruet,
Eur fulven dan a oa lampet :
En pouitr, en ludu eo rentet.

Mes pe oa an tan achuet
Mac'harit ne greiz zo cavet ;
Dindanni eun habit satin guen,
Curunen ar Verc'hez hus de fenn.

Ar boureo cri a c'houlenne
Ha digant Mac'harit neuse :
Mac'harit Frogil din a l-ret
Petra eo d'an tan no teofe quet.

Mac'harit.

Ann tann na ra din d'ong a bet,
Nag al lançonno quen neubet :
Ann Itron-Varia a Voul-Voen
Ra d'ann tan diouzin n'em den.

Ar boureo.

Mac'harit Frogil din a leret
Petra oa d'ar potans n'ho crougequet.

Mac'harit.

Ar potans na ra din d'ong a bet
Nac ar lançonno quen neubet :
An Itron-Varia ar Folgoat
Voa scabel dindan ma daou droad.
Mes me ha breman d'ar Folgoat.
O ia mar gual ma c'halon pad.

Bars er Folgoat pen d'eo arriet
Ar c'hleier da zon zo commanset
Mac'harit Frogil a lavare
En chapel ar Folgoat y'he daouline :

Bonjour dec'h, emezi, Guerc'hez,
Bezit evidon advocadez ;
Me rei dec'h croaz ha bannier.
Ha goisquamant d'ho ter oter.

Me rei dec'h eur gouris coar
Hac a rei ter dro d'ho o l douar,
Ter dro diavez, ter dro diabarz
Dont d'allumin oar ann oter vraz.

Me rei dec'h eur bannier voen
Seiz cloc'h arc hant ous he frejen,
Ha rubannou sei ouz o d'erc'hel,
Voa quet he guir peur achuet
En chapel ar Folgoat eo decedet.

Homan eo guerez Mac'harit Frogil
D'ann nep en goar ez eo fassil.
Nep e jileo gant attantion
En deus daou c'hant devez pardon ;
Nep he c'han en deuz ouspenn
Joa ann Envou, mar e gouten

(Propriété.)